

An daou dort - 1

Ur wech e oa daou dort, Nonnig ha Gabig, hag e oant kamaradoù o-daou. Kemenerien e oant o-daou ha bemdez 'h aent da labourat d'ar menajoù war ar maez, pep hini deus e du. Un noz, pa oa Nonnig o tont en-dro deus e devezh, diwezhat un tamm, degouezhet en lann Penn-ar-Roc'h, e klevas mouezhigoù o kanañ evel-henn :

Dilun, dimeurzh, dimerc'her.

- Daoust piv a zo o kanañ evel-se ? a lâras ennañ e-unan.

Hag e tostaas, doustadig. Sklaer e oa al loar hag e welas an dañserien-noz, a vez lâret kornandoned dioute, dorn-ha-dorn, o tañsal en kelc'h hag o kanañ. Unan a gane a-raok :

Dilun, dimeurzh, dimerc'her.

Ha tout ar re all a gane war e lerc'h :

Dilun, dimeurzh, dimerc'her.

Ha ne lârent ket 'met se. Nonnig 'neva klevet alies komz eus an dañserien-noz, met biskoazh na 'neva gwelet anezhe, ha 'non guzhas a-drek ur roc'hell evit sellet dionte. Met gwelet e oe prestig, ha tapet en kreiz ar c'helc'h. Hag i neuze da dañsal ha da dreiñ en-dro dezhañ, ha da ganañ gwashoc'h evit biskoazh :

Dilun, dimeurzh, dimerc'her !

Ha da lâret da Nonnig :

- Deus da dañsal ganimp ivez !

Nonnig ne oa ket ur paotr aonik, ha 'h eas en dañs ; ha setu eñ da dreiñ ha da ganañ gante :

Dilun, dimeurzh, dimerc'her !

- Ha goude ? a lâras, gwall verr eo ho son.

- N'eus ket ken, a lârjont dezhañ.

- Penaos n'eus ket ken ? Petra zo kaoz na lâret ket ivez :

Dirio ha digwener ?

- Ya 'vat ! a lârjont tout. Se zo brav-kaer.

Hag i da ganañ neuze :

Dilun, dimeurzh, dimerc'her,

Dirio ha digwener!

Ha da vont en-dro, en-dro !

Pa c'hoantaas Nonnig mont kuit e lârjont an eil d'egile :

- Petra a rofomp d'an den-mañ, evit bezañ hirraet ha bravaet hon son ?

- An dra a garo, arc'hant hag aour kement ha ma karo, pe bezañ didortet.

- Ma keret didortañ ac'hanon 'vat, a lâras Nonnig, n'houlan ket 'met se ganac'h.

Ha kenkent e oe lamet e dort dezhañ, hag e teuas d'ar gêr skañv hag eeun, ha memes ur paotr koant.

An daou dort - 2

An deiz-war-lerc'h, pa welas e gamarad Gabig anezhañ, e oe souezhet.

- Petra, emezañ... hag e selle deus e gein... ha da dort ?

- Aet kuit, evel a welez.

- Penaos eo degouezhet kement-se ?

Hag e kontas dezhañ evel ma oa degouezhet an dra.

- A ! me 'h ey ivez emberr da noz da Benn-ar-Roc'h, da welet an dañserien-noz.

Hag e reas evel ma 'neva lâret. Pa arrias 'ba al lanneg e oa adarre ar gornanded o tañsal hag o kanañ :

Dilun, dimeurzh, dimerc'her !

a gane unan da gentañ, hag ar re all war e lerc'h :

Dirio ha digwener !

Hag e troent, hag e lampent !

Gabig a dostaas hag e larjont dezhañ :

- Deus da dañsal ganimp ivez !

Ha setu Gabig dorn-ha-dorn gante, ha da dañsal ha da ganañ evelte :

Dilun, dimeurzh, dimerc'her,

Dirio ha digwener !

- Ha goude ? a lâras.

- N'eus ket ken. Petra, c'hwi a oar c'hoazh ?

- Ya da !

- O ! lâret 'ta, lâret 'ta !

Ha disadorn ha disul !

- O ! se n'eo ket mat ! Se na junt ket ! Hon sonig a oa koant-kaer a-raok, ha n'eo ket ken bremañ ! Petra a vo graet dezhañ ?

- Lakaat dezhañ tort egile, a lâras unan.

- Ya, ya, lakaat tort egile war e hini.

Hag e oe peget tort Nonnig dezhañ war e hini, hag e teuas d'ar gêr drouk ennañ ha mezhus-bras, m'ho ped da grediñ.

Hag evel-se, ar peurrest e vuhez, e renkas dougen daou vec'h, e hini hag hini e gamarad.

Dastumet en Plouared gand F.M. An Uhel.